

TEM 1 : An Dispac'hoù hag an Impalaeriezh: ganedigezh ar Vroad
LAJAD 1 : An Dispac'h hag an Impalaeriezh: ganedigezh ar Vroad

Perak eo ar prantad dispac'hourel un torr meur get ar Renad Kozh, penaos eo bet treuzfurmet penn da benn ar vuhez politikel ha dispaket mennozhioù politikel nevez ur vroad etre 1789 ha 1815 ha ganet ur meizad (conception) nevez, ar vroad, diazezet àr an ingalded, ar frankiz hag ar c'heodedouriezh?

Termenadurioù :

Souvereniezh : gwir da implijout ar galloud politikel en e bezh àr an tiriad hag e annezidi

Broad : ur gumuniezh tud get perzhioù boutin (yezh, istor, raktres politikel..) hag enne ar c'hoant da vout asamblez hag a glask tapout ar galloud politikel.

DIGORADUR

I. Eus « l'année sans pareille» (Louis Sébastien Mercier, kronikour, romantour eus emsav ar Sklêrijenn 1740-1814) betek droukziwezh ar vonarkiezh vonreizhel (1789-1792) : ganedigezh ur vroad souveren

A. Fin ar Renad Kozh : fin ar vonarkiezh absolud ha framm kevredigezh an tri urzh

Fichenn dielloù àr ar Bastille : D1 D2 D3 D4

1. **Louis XVI**, rediañ da c'hervel **ar Breudoù (Stadoù)** meur, evit dont er-maez an enkadenn arc'hant **(diell 1 pajenn 16) + G 3-4 pajenn 24**

E miz Genver 1789 e oa galvet ar Breudoù meur gant ar roue en un doare ofisiel evit miz Mae. Lidet e oa digoradur ar Breudoù meur e Versailles, **d'ar 5 a viz Mae 1789** e sal "Menus plaisirs". Bez e oa kannaded an trede urzh o c'hortoz adreizhadennoù, met dipitet int get ar prezegennoù kentañ: nac'h a rae ar roue ar mennozhioù ha ne rae e vinistr pennañ, Necker, meneg nemet eus kudenn an arc'hant.

2. D'ar **17 a viz Mezheven 1789**, o lavarout e oant kannaded, 97 % eus ar boblañs en em zisklerias kannaded an trede urzh "Bodadenn vroadel", heuliet get un nebeud izili eus ar c'hloer da lâret eo int zo ar **souvereniezh vroadel**. Touiñ a rejont da reiñ **ur Vonreizh** d'ar rouantelezh.

G 5+6 pajenn 24 : **D'an 20 a viz Mezheven 1789**, tizhout a ra kannaded an Trede-Urzh neuze **sal ar "Jeu de Paume"** (ar C'hoari Tripod), ma teuas kannaded a oa eus ar c'hloer hag an noblañs d'o heul; ober a raent al le (touadenn) da chom a-gevret "betek ma savet Bonreizh ar rouantelezh". UN DISPAC'H POLITIKEL EO.

E-pad an hañv 1789 e skarz ar bobl ar gevredigezh e tri urzh 3 emsav dispac'hourel en hañv 1789 (labour) E Versailles, E Pariz, war ar maezioù.

3. Kemeridigezh **ar Bastille : 14/07/1789** + Aon bras en hañv 1789+ torridigezh an dreistwioù = terriñ ar Renad kozh ha volontez unvaniñ **ar Vroad**.

Fichenn : kemeridigezh ar Bastille 14 a viz Gouere 1789

Emzalc'h ar roue a oa amjestr: abaoe fin miz Mezheven emañ é strollañ soudarded en-dro da Bariz pa oa priz ar bara o vont war gresk hag an naonegezh o tont war-wel pe neuze ar moustrerezh an hini eo e oa é prientiñ ;

D'ar **14 a viz Gouere e laka pobl Bariz** an armeurioù hag an "Hôtel des Invalides" (Ti ar re vuturniet) en arigrap. Deredek a ra neuze war-zu kreñvlec'h ar "Bastille" ma soñje kavout poultr hag armoù ennañ. Daoust da strivoù ar gouarnour De Launay, a glask marc'hata ganti, e ya an engroez (foule) tre e-barzh ar c'hreñvlec'h ha lazhadegañ a rae an difennerien anezhañ.

An Aon bras : E fin miz Gouere e yae an emsav war vrasaat ha muioc'h-mui a gastelloù e veze argadet hag en em lediñ a rae emsavadeg ar gouerien àr ar vro a-bezh pe dost.

A-benn degas ar sioulder en-dro eo divizet diouzh noz ar **4 viz Eost 1789**, abalamour d'ar "walleur a reuzie an noblañs", evel m'hen skrivas ar markiz de Ferrières, **terriñ ar gwirioù feodel**, ar justis-aotrou, an deog, ar gwerzhañ kargoù, an disamm-tell, dreistwioù ar c'hêrioù hag ar proviñsoù.

B) Fin ar Renad Kozh,ur Frañs nevez get :

Penaos e vez lakaet e-pleustr, edan ar prantad dispac'hourel, ar c'hemer perzh er vuhez politikel ?

1. **Pajennoù 26-27 G 1-2-3-4-5-6** : D'ar **26 a viz Eost 1789** eo kadarnaet fin ar Renadur Kozh, get ar Vodadenn, en ur zougen "Diskleriadur gwirioù ar mab-den hag ar c'heodedad", eo resisaet getañ pennaennoù nevez ar gevredigezh.

Er **Vodadenn vroadel** e labour ar gannaded a-benn ad-aoziñ ar rouantelezh;

2. Simplet eo ha savet un aozadur melestradurel nevez roet d'ar vro : rannet eo Frañs e 83 **departamant**, rannet e distriktoù, kantonioù ha kumunioù o fenn kargidi bet dilennet.

3. **Poent tremen : Rol ar maouezed en Dispac'h pajennoù 30-31 Itron Roland**

4. Ur vuhez politikel nevez é sevel : ha meur a live politikel disheñvel a gas meur a sav-poent evit ledanaat an tabut foran. Kreskiñ a ra ar c'helaouennoù niverusoc'h-niverus a skign ar mennozhioù e breud. Prientet e veze ar breutadennoù e **kluboù** evit tabutal àr ar bolitikerezh.

5. An Dispac'h a glask diskoulmañ kudenn an arc'hanterezh: lamet eo bet an tailhoù kozh. An eskob Talleyrand a ginnig, e miz Du 1789, e vefe lakaet e gwerzh madoù ar c'hloer evit paeañ dleoù ar Stad: **broadelaet e oa madoù ar c'hloer**.

6. **Diell 1 pajenn 18** : Mouezhiet eo ar **Bonreizh** d'an 3 a viz Gwengolo 1791, a-benn ar fin. Diazeziñ a ra ofisializadur ar vonarkiezh bonreizhel war benaenn disrann ar galloudoù. Newazh e verk un disfiz doubl a oa ennañ.

C. Tamm emglev ebet etre ar Roue hag ar Vroad: eus an unvaniezh vroadel d'an troc'h etre ar vroad hag ar roue

1. D'ar **14 a viz Gouere 1790**, e-pad « **gouel ar Federadur** » eo dalc'het touell ar gonkardenn trilig etre ar bobl hag ar roue. 14 000 gward broadel, deuet eus pep korn ar vro e oa bodet er «**Champ de Mars**», 300 000 a dud a oa oc'h arvestiñ oute. Anvet int ivez « **soudarded-keodediz** », rol dezhe derc'hel an urzh e-diabrizh ar vro e kêr pe àr ar maez. Int a a c'hell souten an dispac'h pe gwaskiñ keodediz gwallgontant eus kresk ar bara. Dirak **La Fayette**, komandant ar Gward broadel, ha **Talleyrand**, a lavaras un oferenn, e toua Loeiz XVI da zerc'hel ar Vonreizh. Tu oa da grediñ e oa peurglok an emglev etre ar roue, ar Vodadenn hag ar bobl.

Pajenn 25 repères Met e gwirionez e nac'h ar roue ar c'hemmoù hag a zo é izelaat e vri (dignité) hag é tagiñ an hengounoù gwarantet a-viskoazh getañ.

2. Fondañ a ra Louis XVI touell (illusion) ar **gokardenn trilig** é klask get e familh, rouanez hag o bugale, d'an **20 a viz Even 1791** tec'hout kuit **eus Palez an Tuileries** e Pariz, koñsideret prizonidi get ar Vodadenn hag ar sans-culottes. Harzet un nebeud kilometradoù pelloc'h, e **Varennes**, ha kaset da Bariz en-dro, Kollet getañ fiziañs un darn vat eus annezidi Bro-C'hall, a grog neuze da c'houlenn ur Republik. Get tec'hadenn ar roue e sav disranniezh e-touez an dispac'herien.

3. Oc'hpenn ez eus tennderioù etre Bro C'hall hag ar monarkiezhioù estren : d'an **20 a viz Ebrel 1792**, ar roue hag ar Vodadenn, àr atiz ar **Jirondiz**, a zisklêria ar brezel doc'h roue Bohemia hag Hungaria (da lâret eo, Aostria), a oa roet skor (soutien) dezhañ get Prusia kentizh.

4. Droukziwezhioù, aloubadeg ar vro, gourdrouz **Brunswick**, enebiezh a-enep d'ar roue a gas ur gumun emsavet krouet get ar «**Sans-culotte**»-ed ha, get skoazell ar **federidi**, da arsailhiñ ouzh **Palez an Tuileries** d'an **10 a viz Eost 1792**. Harzet eo ar roue, koñsideret **retour**, **trubardour** (félon) evit ar **vrogarourien** ha toull-bachet.

Ur renad nevez a gemer plas :

II. Kantrenoù (errements) ur vroad rannet : 1792-1799

A. Ar Republik trubuilhet ha tonkadur ar roue : ar brezel a-enep d'ar roue 1792-1793

1. Ne oa ket tu ken derc'hel ar vonarkiezh Vonreizhañ e-pleustr. Diviz a ra ar gannaded ma vefe dilennet ur **vodadenn dre hollvouezhiadeg** a vefe karget da skrivañ ur bonreizh nevez: **ar «Goñvañsion»**.

Ur renad nevez a gemeras he flas: ar Republik.

En em vodiñ a ra ar Gonvañsion goude **trec'h Valmy** (20 a viz even 1792) a-enep d'ar arme aostrian ha reizhekaat (légitimer) a ra ar renad poltikel nevez : ar Republik.

D'an **21 a viz Gwengolo 1792** e oa mouezhiet torridigezh ar vonarkiezh get holl gannaded ar Gonvañsion e oa divizet gete deiziata an aktaoù ofisiel a dal «**Bloavezh I ar Republik**».

Renet eo bet Bro C'hall, etre 1792 ha 1795, get ar **g-Goñvañsion** a voe getañ en he fenn ar « **Girondins** » ha goude-se ar « **Montagnards** ». **Menezidi- Jirondined- Plaeenn= diell 2 p19 + pajenn 20**

-Ar **Jirondiz**, kentoc'h moderet, a heuilhe **Jacques Brissot**, ur c'hazetenner bet kloareg ur prokolor, ha **Pierre Vergniaud**, un alvokad eus Bourdel, den lennek hag helavar-tre (éloquence). Kavout a reed ur jedoniour brudet en o zouez ivez, **ar Markiz De Condorcet**, a

veze sellet outañ evel ar “prederour diwezhañ”. An **ltron Roland**, maouez speredek ha desket bras, a levezone oberoù ar Jirondiz.

-Ar **Venezidi** a oa en o fenn **Maximilien de Robespierre**, un alvokad genidik (natif) eus Arras, rust ha strizh e zoareoù. Lesanvet e oa bet “L'incorruptible”, an hini ne c'helle ket gounit dre arc'hant, get ar mil onest ma oa brudet an den da vezañ. E vignon **Antoine Saint-Just**, ganet e 1767, a oa kannad yaouankañ ar Gouvansion hag unan eus ar re sonnañ (figé, raid) en o mennozhioù.

Bras e oa brud ar mezeg **Jean-Paul Marat** e-touez ar “Sans-culotte”-ed, a veze difennet diarsav(perpétuel) en e gazetenn “L'Ami du Peuple”. E-kichen Robespierre hag e re, edo **Georges Danton** hag ar **Camille Desmoulins** o reiñ lusk d'ur rann douget muioc'h d'an treuzemglevioù. Ur prezegenner hep e bar e oa an alvokad **Danton**, hogen tennañ a rae vad a-wechoù e gefridi evit en em binvidikaat. Ar Venezidi a oa c'hoazh en o zouez un ez-**Fouché**, al livour **David**. Enebourien-douet ar rouantelezh int, kreñv e oa o levezon e Pariz. Fellout a rae dezhe diazeziñ ar Republik àr reolennoù an ingalded hag an demokratelezh ha kavout a rejont harp, diàr nevez-amzer 1793, e-touez an artizaned hag ar stalierien a-du get an Dispac'h hag ivez àr « Gumun bPariz »> hag ar Sans-culottes.

-Er c'hreiz edo ar **b-Plaine** a gaved enni kannaded dispisoc'h o mennozhioù evel an **abad Sieyes**. Harpiñ ar « Girondins » a rejont betek miz even 1793.

21/09/1792 betek miz even 1793 : Ar galloud e oa get ar Jirondiz betek miz even 1793.

2/06/1793 : Goude : Montagnards

2. **Poent tremen : prosez ar roue pajennoù 28-29**

Gwilhotinet e oa **Loeiz XVI** d'an **21 a viz Genver 1793**.

B. Ar Republik a-enep dezhi hec'h-unan= ar Spouron 1793-1794

1. Fae a oa graet war penadennoù 1789. Lakaat a rae **ar gouarnamant dispac'hel** sentiñ outañ dre **ar Spouron**: get al **lezenn war an dud disfiz warne** e c'heller serriñ n'eus forzh piv, koulz lavaret. Marie-Antoinette, Jirondiz e-leizh ha kalz a re all, keodediz ordinal “**diskred warne**” hepken, a oa kaset d'ar gwilhotin. Lazhiñ a rae **ar Spouron**: 17 000 den a oa kondaonet d'ar marv ha kement-all a dud a oa lazhet diwar lazhidigezhioù trumm.

Ar Goñvañsion ha **Komite ar « Salut public »** ar gouarnamant savet get kannaded evel Robespierre a gemer diabarbennoù evit bihannat ar mizer: : war **lezenn an Uspoente** oa merket priz an danvezioù-bevañs ret-holl ha live ar goprou. War an dachenn relijiel, ar veleien didou a oa lakaet disfiz warne. Kas a ra an emsavadegoù en Antilhez torridigezh ar sklaverezh en trevadennoù **e 1794: dielloù pajenn 36**

Efedus e voe ar Spouron er rannvroioù: peurdrec'het e oa bet an emsavadegoù a-enep d'ar Republik goude emgann trec'h Fleurus d'ar 26 a viz Even 1794.

Dibaouez e oa ar Spouron. Harzet e voe bet Robespierre ha Saint-Just, àr atiz ar Montagnards, kannaded ar Plaine : tamallet dezhañ da vout kriz, sikouret get ar Sans-Culottes **d'ar 27 a viz Gouere 1794 (9 Thermidor)**. Dibennet e voent o-daou en devezh àr-lerc'h get ur c'hant bennak eus o c'henseurted.

3. Politikerezh alouber ar Gouvansion ha lazhidigezh ar roue a oa kiriek d'ur c'hengevreadur europat a-enep d'ar Stad-C'hall. Treiñ a rae fall ar brezel.

Ar Republik gourdrouzet hag en arvar : ar brezel a c'houlenn kalz a soudarded.

Sevel a ra ar Goñvañsion **d'ar c'halvadeg veur e c'hwevrer 1793** a-benn kaout 300 000 den. Kalz a emsavadegoù a oa bet e **Vende (nevez-hañv 1793)**, Breizh, annezidi a nac'he breleziñ evit ur Republik he doa dibennet ar roue. Er Goñvañsion en em rann ar gannaded e-keñver an diabarbennoù da gemer: e miz Even 1793 ar Jirondined zo harzet ha dibennet (22) àr atiz ar Venezidi harpet get ar Sans-Culottes.

C. An « Directoire », Republik des Egaux= republik ar Birien 1795-1799

Goude marv Robespierre en em gav kannaded **ar Blaenenn** a zeu e-penn ar Goñvansion= an **d-Thermidorianed** a veze graet anezhe : un dibenn eo lakaet d'ar Spouron bras o herzel ar Venezidi kozh hag ar San-Culottes.

Diell 1 pajenn 20 : Ur **vonreizh nevez e 1795** ha **mouezhiadeg doc'h ar sens**.

Met ez eus diaesterioù ar vro : rivinet eo ar Stad get ar brezel, an dienez, torfedoù (délinquance) ha disurentez a ya àr-gresk. **An Directoire** eo anv ar renad nevez-se.

Kreñvaat a ra an enebiezh doc'h renad.

Er c'henarroud-mañ e ra e vad eus gwander ar renad evit chefed eus an arme: **Napoleon Bonaparte**.

War-lerc'h taol-stad an **18 a viz Brumaire (9/11/1799)** , adalek miz Du 1799, e stag Napoleon Bonaparte da adreizhañ ar Stad.

III. Soliaat ur vroad ad-unvanet: peurachuiñ pe derc'hel an Dispac'h ? 1799-1815

A. Kaezerezh, an diskoulm politikel 1799-1804= Koñsuliezh

Termeniñ césarisme : galloud aotrouniek ha personel, é gwarantiñ an urzh, é reiñ da grediñ é gwarantiñ ar peoc'h sivil (surentez ar madoù hag an dud) dirak meur a interest disheñvel

Ur **Gonstitution nevez**, hini ar bloaz VII (**miz Kerzu 1799**), a lakaa etre daouarn Bonaparte, anezhañ ar **C'hentan Konsul**, al lodenn vrasañ eus ar galloud.

Mirout a ra ar Republik hag hec'h arouezioù (banniel triliv, deiziadur republikan, *Marseillaise*) met aotrouniek eo ar renad.

Ur galloud kreizennet-tre eo get ur velestradurezh stag doc'h ar galloud seveniñ.

Adreizhet eo ar velestradurezh : **prefed** e 1800, anvet get ar C'hentañ konsul

Lejion a enor e 1802 evit trugarekaat ar re o deus roet servijet ar vro en un doare bennak

B. Ar « masses de granit » evit peurachuiñ an Dispac'h STARTAAT AR RENAD

1. Tra ma striv evit adlakaat urzh er vro e ra Bonaparte eus e wellañ evit prientiñ an dazont dre "**ziazezañ war an douar un nebeud savennoù greunvaen**". Setu aze an anv roet digetañ d'an ensavadurioù hag e oa o fal stabilaat ar gevredigezh evit ur pennad mat a amzer hag ivez stabilaat ar renad.

Al liseoù krouet e 1802 :

Adreizhoù ekonomikel : Krouidigezh ar Bank gall e **1800** evit adlañsañ an amprest. Moneiz nevez e 1803 « **ar lur germinal** »

Adreizhoù sokial : -sevel un elit notabled feal ha sentus karget da vont en-dro ar Stad sinadur **ar C'honkord** e **1801** get ar pab Leon VII : achu eo get an digristenaat kaset get ar republik e 1793 **Pajenn 36 G 1-2-3-4**

-distro an nobled kristen ha roueelourien , o marc'hadiñ gete reiñ postoù kargidi ar stad.

2. En trevadennoù e **1802** eo ad-savet ar **sklaverezh** é kas reveulzioù hag e rank ar Frañsizien kuitaat Haiti, daet da vout dizalc'h. **pajenn 34**

Mirout a ra pennaennoù dispac'hourel é skigniñ anezhe en Europa :

3. Poent-tremen= Kod sivil pajenn 37 G 1-3

-**Kod sivil** e **1804** : 2000 rann, e bal urzhiañ ar vuhez er gevredigezh get ar familh, ar berc'henniezh a zeu da vout peulioù diazez ar gevredigezh.

>Benveg evit derc'hel an urzh sokial

C. Eus gounidoù brezel an Impalaeriezh d'an diskar 1804-1815

1. Tennañ a reas Bonaparte e vat eus kement-mañ evit lakaat embann e vefe Konsul a-hed buhez (**pobl-votadeg** an **2 a viz Eost 1802**).

Met ne oa ket a-walc'h evit **Napoleon** dont da vout « **Impalaer ar C'hallaoued** » (**mae 1804**) get mouezh ar bobl (**mae 1804** o reizhekaat anezhañ). Rediañ a reas ar pab **Pie VII** da zont, d'an **2 a viz Kerzu 1804**, da **Bariz** evit kurunennañ anezhañ. Heuliañ a ra ar renad un doare nevez get ganedigezh un **dinastiezh nevez** : hini ar Bonaparte. Beviñ a ra familh an impalaer evel ur familh o ren. En-dro dezhañ e sav Napoleon 1añ ur lez henvel mik doc'h hini roueed ha krouiñ a ra un noblañs impalaerdel, gwrizienn ebet dezhi er gwirioù-dreist met diazezet àr an dellid hag ar vrud. Da skouer **Lefèvre**, letenant e 1789 a zeu da vout marichal an impalaeriezh ha dik Dantzig evit echuiñ.

2. Etre daouarn Napoleon e oa bodet an hollc'halloudoù. Gouarniñ ha lezenniñ a rae dre zekredoù. Ar vinistred zoken ne veze ket lezet gete intrudu ebet.

Doc'h ar frankizoù ne van (subsister) netra ha edan evezh e vez lakaet menoz pep den. Renet get Fouché, ar polis eo dre holl. Lakaet eo an Deskadurezh hag an Iliz e servij ar Stad. A-dal 1808 **Katekiz an Impalaeriezh** eo ret da bep hini tenniñ e vat outañ.

2. En **Europa** eo bet skignet mennozhioù an dispac'h evel sevel ur vonreizh evit ar broioù taget, terriñ an dresitwiroù, pennaenn an ingalded dirak al lezenn. Ezporzhet ar Chod sivil, troet e italianeg, alamaneg ha poloneg. Degemeret mat eo an Dispac'h ha uhelvennadoù ar frankiz, an ingalded get al lodenn vrad eus Europa. Da gentañ eo degaset spi en Europa da zalc'hidi ar Sklêrijenn get Dispac'h 1789. Adalek 1794 e voe degemeret an armeoù gall evel dieuberezed er broioù aloubet, peogwir e veze lamet gete an deog, ar gwirioù aotrouniek, an dreistwiroù.

A-dal 1792, ar brezel, kinniget evel ur stourm a-enep ar roueed en deus kaset ganedigezh ar **Republikoù-c'hoar** (da vare an Directoire etre 1795 ha 1799 ar Stadoù àr harzoù Frañs (Holland, Suis, Genova.) edan dalc'h Frañs a zegemer ur vonreizh doare gall). Pouez Arme Veur (eus 150 000 den e 1805 betek tremen da 500 000 e 1812) a zegas ivez enebiezh a-berzh pobloù Europa evel **e Bro Spagn** da skouer. Met buan e teu dalc'herezh ar Frañs da vout hegazus.

An Arme veur a vev diwar he **freizhadennoù** er broioù aloubet ha ne vez ket doujet atav d'an ilizoù; ar poblañsoù a rank paeañ tailhoù uhel d'ar Frañs ha reiñ soudarded d'an Arme veur. . En em sevel a reas ar bobl e Spagn a-enep d'an alouber ada-lek 1808, hag e darn vrasañ ar broioù aloubet ez ae ar **santimant broadel** war gresk.

3. E penn kentañ **1808** e tiviz Napoleon aloubiñ Spagn ha kas kuit eus e gador-veur ar roue **Charles IV** a oa re a-du get ar Saozon evit lakaat e vreur **Jozef Bonaparte** en e blas. Aloubet e voe ar vro gant an Arme veur.

D'an **2 a viz Mae** koulskoude, en em sav poblañs **Madrid** a-enep ar strolladoù gall a zalc'he ar gêr. Un emsav broudet get an noblañs ha fantizet get get veleien en em sav. Antronoz e savas ar **marichal Murat** ur griz a waskadur, ar pezh a washaas stad an traoù. Ar reveulzi a red buan e Spagn a-bezh.

Test e oa bet ar Spagnol **Francisco Goya** (1746-1828) eus ar reveulzi, eñvorennoù an 2 hag an 3 a viz Mae a voe livet gantañ war an taolennoù **Dos ha Tres de Mayo**. Diskouezet e oant bet e Madrid goude ma oa aet kuit ar strolladoù gall e 1814.

Aes a-walc'h eo andra-se da gompren pa ouier pegen stag eo ar Spagnoled doc'h ar gatoligelezh, Napoleon é vout evite kendalc'her an Dispac'h, lahzer-roue hag enebour ar relijion. Lakaet eo an Arme Veur en ur pleg fall get ar « guerilla » sikouret get ar Saozon àr dachenn ar brezel hag evit pourveziñ ar c'hef.

4. Goude un ehan berr a beoc'h ec'h adkrogas Napoleon da vrezelin en-dro e 1803. War vor e voe diskaret morlu ar Frañs get ar Saozon e-kichen kab Trafalgar. War zouar avat e voe trec'h an Arme veur war Aostria ha Prusia - **Austerlitz (1805), Iena (1806), Wagram (1809)** - ar pezh a lakaas Napoleon da emledañ beli ar Frañs war Europa.

130 departamant a voe er **Frañs e 1811**, pa voe e barr he beli. Stadoù a voe dindan he dalc'h tro-dro dezhi, en o fenn izili familh Napoleon bet lakaet eno gantañ pe priñsed suj. Deuet e voe Prusia, Rusia hag Aostria da vout he c'hevredidi. Ne oa nemet **Bro-Saoz** evit kenderc'hel da vrezeliñ. Mennet e oa Napoleon d'he diskar get **blokus ar c'hevandir**.

5. E **1812** e voe brezel en-dro ha Napoleon a voe trec'het da vat e **Rusia**. Ret e voe dezhañ kilañ hag e koll kantadoù a viliadoù a soudarded. **Ur c'hengevreadur european** a savas a-enep d'an impalaer. Hemañ, trec'het, a rankas reiñ e zilez evit lezel e blas gant **Loeiz XVIII e 1814**. Adkemer a reas ar galloud e-pad un nebeud amzer c'hoazh, met trec'het e voe da vat get armeoù Europa kengevredet e **Waterloo**, e Belgia a vremañ, e miz **Even 1815**.

klozadur :

Tri mare a zo bet war-lerc'h an eil egile e-pad mare an Dispac'h hag an Impalaeriezh.

- Edan ar vonarkiezh bonreizhel (1789-1792) eo deuet ar vroad da vout mestrez warni hec'h-unan.
- Goude-se, edan ar C'hentañ Republik (1792-1799), enem rann ar vroad.
- Edan ar Gonsuliezh hag an Impalaeriezh (1799-1815), eo bet kreñvaet ar vroad.

An Dispac'h gall hag ar mare napoleonat o deus degaset un troc'h bras get aozadurioù politikel ha kevredigezhel eus ar Renad kozh. Un doare nevez da gompren ar vroad a zo savet, diazezet war an uhelvennadoù (idealoù) dispac'hourel evel ar frankiz, an ingalded hag ar c'heodedouriezh.

Daoust d'an tabutoù hag ar bevennoù (skarzhadennoù, feulster, trec'hoù kollet...) ez eus bet enni, he deus an Dispac'h gall hag an Impalaeriezh leusket ur glad padus, dreist-holl e-barzh an aozadoù politikel, ar gwir hag ar levezonkaset àr an emsavioù dispac'hourel a zeuas goude. Setu perak e chom ar mare 1789-1815 ur prantad pouezus-kenañ e istor broad ar C'hallaoued.